

En Arvor, d'ar 24 a viz Mae 2021

Hiziv an deiz c'hoazh ne gredan ket eo marv Yannig.
Anavezet 'm eus anezhañ evel kenlabourer e Skol Diwan An Oriant. Ha labourer 'm eus gantañ e-pad un nebeud bloavezhioù.

Pet gwezh 'm eus direnket anezhañ en e glas e-pad an eur kreisteiz? O kregiñ gant ar vicher ha gant ar brezhoneg e oan. Neuze, ur bern goulennoù am boa.
Yannig a ouie kement a draoù e-keñver ar brezhoneg !

Pet gwezh hon eus c'hoarzhet e-pad an ehanoù war ar porzh?
Yannig en doa fent e-leizh !

Ha pa soñjan en arvestoù Nedeleg pe fin ar bloavezh-skol dirak ar gerent ! Lakaat a rae kement a startijenn er pleustradegoù. Ha gantañ e teue a-benn ar skolidi da dizhout ul live uhel-tre evit kanal, seniñ fleüt. Brav-tre oa da welout ha da selaou !

Ur paotr ken plijus oa Yannig, aet kuit ken yaouank ha ken buan, pegen trist eo !

Valérie Le Gal, skolaerez e Diwan An Oriant